

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

93. KOAT AN NAY

( follennoù 9 - 10 )

Pa vezan bemdez e vont dam skol  
e vez va mestrez e tall e dor.

hag hi e lavaret ken ardant :  
- Dibonjour deoc'h, va dousik koant.

Doc'h ar c'homzo a leveret  
va godissa eo a ret.

- Neket ho godissa eo a ran  
Kousket ganec'h a zeziran.

- Deud gant ar markiz Koat-an-Ne  
Dam goulen digant va ligne.

Dam goulen digant va ligne,  
ne veet ket refuset men toue.

- Dibonjour dec'h, markis Koat-an-Nay  
- A dec'h ive va breur mager.

- Deud-tu ganeme da Crec'hgoure  
Da houlen ar penerez ahane.  
Ne viot ket refuset e men toue.

- Va breur mager, c'hui e voar er vad  
an dra-ze ne ve ket gred mad.

Perc'hen pem mil skcet a leve  
a lignez nobl a galite

- Rentet-tu dime va mado  
a baoue ma ze va zud maro

Breman pa zeo ed va zud gant Doue  
Me zo mest d'ober va bolonte!

Da kemeret va santimant  
An den man pa ze kontant.

~~~~~

Jannet Puill, 9 févr. 1851

~~~~~